

# KELENNOU

## HAG HIRVOUDOU

EUR BÈLEK-KOZ

---

Brasa joa en d-oa an Abostol sant Iann, enn he gosni, oa klèvet e kerze he vugale dre hent ar wirionez. *Majorem horum non habeo gratiam quam ut audiam filios meos in veritate ambulare* (St-Iann. III-4.)

Me ivez, deut koz oc'h ober va dever bèlek, am meuz eur rann-galoun, ne c'houfen kaout brasoc'h, o welet an eneou a zo bet maget gan-en euz a vara ar wirionez hag euz a c'hras Doue o trei gant spered ar gaou, o vont da fazia dre an hentchou fall hag o pellaat dioc'h Doue ha dioc'h ar vues kristen, a zo ar gwir vuez.

Pedet ha ouelet em euz, rak armou ar bèleg a zo pedi ha skuilla daëlou : *Clericorum arma sunt orationes et lacrymæ*. Goulennet em meuz a wir-galoun trugarez an Aotrou Doue evit pèc'hejou ar re a garin atao, evit-ho da veza war an hent a gas da goll.

Goude he bedi, an Aotrou Doue en deuz lakeat d'in em fenn lavaret d'am bugale eur ger-bennag evit skleraat ho spered, evit skei ho c'haloun ha, dre an hent-se, evit ma talc'hint-mad d'ho feiz ha d'ar garantez ho deuz oc'h an Iliz santel katholik.

Pell a zo oun bèlek, hag e keid-se em meuz digoret dor an nev da galz a gristenien, da dadou ha da vammou ar re a fell d'in komz out-ho hirio. Bez' e karfen kaout an

esperans da gas ar vugale da gaont ho zadou, a zo e dudi ar Baradoz. Penaoz, bugale Breiz ne zalc'hfent-hi ket stard d'an amzer dremenet ? Kredennou ho zadou arumm da-ruum a zo bet kredennou kristen ; an istor a lavar e voa kre feiz ar bobl bretoun, e voa flamm he garantez oc'h an Iliz. Ar c'hredennou faoz a zo brema n'eo ket ho grisiou evit krègi e douar, hag a so enn he vesiou relegou kemend-all a zent.

**Euz ar brezel great brema da Jezus-Krist  
ha d'he Ilis.**

Mar d-eo d'in eur boan hag eur c'hlac'har vraz gwelet, gant pegement a gounnar hag a zislealded, e rear brema brezel da Jezus-Krist ha d'he Ilis, n'em meuz aoun e-bed evelato, e ve diskaret hou-ma birviken ; stard war he diazez, kenderc'hel a raï war he labour zantel bete fin ar bed. Ar poaniou a rear d'ezhi n'int ket evit trubuilla va ene. Enn deisiou kenta euz he buez, Jezus-Krist a ioa bet lavaret a vije d'ezhi evel eur sin, pe eur merk a rendaël : *In signum cui contradicetur* (St-Luk, II:-34). Oc'h kelennadurez Map-Doue a zave da varn faziou ha direïsiou ar bed, e tlie beza harzet terr ha kallet gant he-ma. Ar vertusioù a c'houlenne digant an dud : beza glan hag izel a galoun, kaout karantez oc'h an nesa ha pardouni pep dismeganz, ar vertuziou-ze a ioa re a-eneb buezegez ar Juzevien hag ar baïaned, evit na vije ket abek d'an holl gwall-dèchou da zevel enn ho enep. Evit kement-se eo en deuz bet Jezus da c'houzanv drouk-prezegèrez ha gwall-gas an dud, epad he vuez. Gouzanv a eureu enn he *basion* ar poaniou hag an dismegansou brasa a-berz ar bobl, en doa ankouna-c'heat he vadoberou hag her goloaz a vez, muia ma c'helle, ken na varvaz war groaz ar c'halvar.

Jezus-Krist en doa lavaret d'he Ebestel, ho divije da

c'houzanv evel en doa gouzanvet he-unan (Sant-Iann, XV-18), hag ho divije an holl kasouni out-ho, abalamour d'he hano (Sant-Vaze X-22). Mez, evel m'en doa lavaret d'ezho a-raok e savje euz a varo da veo ha diwar an douar enn nev, en doa ivez roet d'ezho, dre he c'her, ar fisianz ne doa an Iliz a zavjent o prezeg an Aviel, da gaut aoun na spount dirak ar brezel a rajet d'ezhi, rak birviken holl-c'halloud an ifern ne deuje a-benn d'he zrèc'hi.

Karet a ran choum hep ankounac'haat al lavar deut euz a c'hinou sakr Jezus. Lavar Map-Doue a ielo da-benn ; holl nerz ar-re zifeiz a vezo dinerz enn he enep : Rouantelez Jezus-Krist a zo eternel, da lavaret eo, euz a viskoaz da virviken.

\* Doun eo evelato va foan ha va glac'har : 1° O veza ma 'z euz eun niver braz a eneou distroet dioc'h Doue evit mont da heul faziou ar bed ; o veza na zelaouont ken an Iliz ha ma'z eo gwell gant-ho mont da goll da viken ; 2° O veza ma c'hell sklerijen ar feiz, o koueza atao euz an nev war ar bed, beza kaset euz hor bro da eur vro-all a zalc'hfe startoc'h dezhi. Hag a ilizou a zo bet gwechall kre ar feiz enn-ho, hag a zo brema goloet gant tenvalijen an herezi, gant ar chism, an idolatri hag an difeiz ! Ar pez a zo bet c'hoarvezet gant-ho, ha ne c'hell ket c'hoarvezout e Frans, mac'h ankounac'hafe ar vro-ze ar grasou braz-meurbed e deuz bet digant madèlez an Aotrou Doue ?

**Petra eo natur ar brezel a rear da Jezus-Krist  
ha d'he Ilis.**

Ar brezel a zo great d'an Ilis katholik a zo oc'h he heul : 1° spered difeis Satan ; ar pez ne weler nemet re, siouaz ! gant heuz ha doan. Ar pèc'hed a gasouni a-enep Doue ne veze great gwechall, koulz lavaret, nemet gant

eun nebeudik tud kouezet beteg an derez diveza euz a skeul ar fallagriez; tud hag a ioa, ar re-ze, deut, hag hi beo, da veza tra an drouk-spered a zervichent dre ho zorfejou. Red eo anaout, e gwirionez, ec'h en em ziskouez brema, hep mez hag evel m'ema, an torfed bras-se a laka an ene kristen da grena gant ar spount. Brema ez euz tud hag a vlasfem gant kemend a gounnar a-enep an nev, ma tiskouezont peger braz eo ho difeiz. Tud a zo brema, hag enn ho skridou, enn ho c'homzou ha liez a weach enn ho oberou, ha n'int ket evit kuzet an drouk diboell a zo goret enn ho c'haloun a-enep Doue hag he Ilis. E sosieteu kuzet a zo, ez eus tud hag evel diski-blet Satan a glask miret na ve badezet ar vugale, a glask miret oc'h ar bèlek da vont war-dro ar re glanv. Petra a ve gellet da lavaret eus a oberou an dud-ze, antekristed an amzer-ma, ma na deuont ket euz ar gassouni ho deuz oc'h Doue hag euz a spered an ifern a fell d'ezhan distruja galloud Jezuz er bed ?

2° Ar brezel a zo great d'an Ilis katholik a zo oc'h he heul ar gaou hag an drouk-prezeg.

Enebourien ar relijion a lavar, e pep giz, n'euz enn ho spered nemet pep c'hoant da ober vad d'an dud, Ar pez a fell d'ezho, o lavaret e tle beza libr skiant an den, eo, eme-z-ho, rei ha digas d'ezhan ar gwiriou a zalc'h euz he natur; eo harpa ha difenn he liberte a goustianz; eo hen tenna euz a sklavaj an Ilis. Bez' e fell d'ezho, dre bep gwisiègez ha dre beb ijin o kreski er bed, rei displeg da skiantchou an den, ha digas d'ezhan enn he vuez ar vad hag ar plijaduresiou brasa; e-leac'h ar bèlek, eme-z-ho, a zalc'h ar bobl dizesk; ne fell ket d'ezhan e c'houesfe netra nag e c'hellfe klask he vad, e-touez an dud a c'houarn traou ar bed.

Evit rei kred d'ho gevier, e troont istor an Iliz war an du-enep, dre drubardèrez ha displeaded. Buez ar zent hag ho oberou a zo gant-ho lakeat traou fall, goapeat ha

brèset dindan an treid er vouillen. Klask a reont enn istor ar Babed, an Eskibien, ar relijiuzed kement a ro tro d'ho disprizout ha da c'hcapaat ho vertusiu. Neb a studi an istor, hervez ar wirionez, a wel sklear n'eo nemet drouk-prezegèrez diskiant a zisplegont, tennet gant-ho euz a skridou an heretiked hag an dud difeiz ; n'euz forz a-ze, ne baouezont da liva ho gevier. An Iliz a c'hell diskouez dirak ar bed ar skoliou hag ar gwiriou e deuz savet, evit terri nerz ar poaniou a gouez war an dud. Mez, ne ket nac'h hep ken a ra ar sosieteu kuzet ar vad a zo bet great gant an Ilis, bez' e teuont c'hoaz da strinka ho gevier oc'h ar seurezed ho deuz dilèzet ar bed, plijaduresiou an douar ha pep joa gwirion ar famill evit mont da zervicha ar-re baour, ar-re glanv, ar-re a zo muia dilèzet gant an holl. An dismeganz a zo taolet war vignouned gwella ar bobl ne c'hell dont, nemet euz a sperejou fallakr, euz a galounou breïn.

3° Ar brezel a zo great d'an Ilis katholik a zo oc'h he heul pep direiz ar galoun.

Evit koll ar feiz enn eneou, an dud difeiz ha fallakr a glask trei da fall buezegez vad ar gristenien. Evit an dra-ze, e kreskont bemdez niver al levriou fall e pep giz, evit gellout dre-z-ho kas an dud da blega d'ho zèchou direiz, hag ho lakaat da goueza enn dirollou mezusa. Al levriou, an imachou, ar zoniou, ar c'hazetennou gevier hag evit netra, koulz lavaret, n'int great ha moullet holl, nemet evit mac'h efo ar iaouankiz ampouezoun an droug hag ar pèc'hed evel dour; n'euz resped e-bed zo-ken evit ar vugale a glasker louza ho spered hag ho c'haloun. E pep amzer, al libertinach a zo bet harp ha skoaz an difeiz. Ar galoun vreïn a dec'h hag a bella dioc'h ar gwirionesiou kristen, o veza ma tiskouez ar re-ma d'ezhi ar gastiz a c'houzanvo e-kreiz eul lenn tan ha soufr, a vezo strinket ar-re libertin enn-han.

### Labourou brezel an Ifern.

Al labourou-ze a zo stank a-walc'h enn amzer-ma evit beuzi e kaon an ene kristen, hag evit rei d'ezhan da anaout ez eo red hirio diskouez da Jezus-krist ha d'he lliz eur garantez ar vrasa, evit digoll an dismeganz a rear war-n-ho ha war ar relijion.

1° Ar pezh a fell d'an dud difeiz a ren brema eo, da genta, *forsi* Jezus-Krist da choum enn he ilizou. Eno e c'hello, eur pennadik c'hoaz, beza adoret gant eun ene kristen-bennag, a vihana ho niver bemdez. An dud difeiz ne fell ket d'ezho anaout e tle Jezus-Krist kaout gal-loud e-bed da ren er bed. Jezus-Krist a vezo neuze er bed, he dra, evel eun den estren o veva enn eur vro ne ket he vro eo ; neuze Jezus-Krist, pa vezo hano da glask mad ar vro-ze, a vezo lakeat evel netra enn-hi. E meur a gear, enn amzer-ma, eo difennet oc'h ar *broseion* mont euz an iliz, hag an difenn-ze a skign hag a skigno dre-holl. Jezus-Krist, deiz he c'houel, ne c'hell ken mont dre ruiou ar c'heriou da rei he vennoz d'ar bobl kristen war he zaoulin dira-z-han. Ar re zifeiz ne fell mui d'ezho e ve relijion publik e-bed ; ar c'houarnamant ne fell mui d'ezhan na pedi nag adori Doue.

2° E-touez ar re a zo e-leac'h ar c'houarnamant, karget da glask ha da ober mad ar vro, eun niver braz a zilèz peb ober gristen, e-kever ho relijion. Kalz anezho ho deuz evel mez o tostaat oc'h an ilizou hag o lakaat ho zreid enn-ho ; ha lavaret e ve ne reont forz e-bed euz a gement tra a zell oc'h Doue hag oc'h he relijion.

3° O welet e pe zoare e ren ho buez tud kargou braz ar c'houarnamant, tud ar c'hargou bihan ha dister a zo deut enn ho spered ar greden e voa mad d'ezho ivez choum heb ober pers kristen e-bed, pe da vihana, ar re n'int ket lakeat pezh hejou a-enep gourc'hemennou Doue

ha re an Iliz. Kalz anezho a zo c'hoaz ar feiz kristen enn ho c'haloun, hag evelato ne gredont ket diskouez int kristenien dre ho oberou. Klèvet em meuz va-unan gant meur a hini ne reant evel-se, nemet gant aoun da goll ho c'hargou hag evit miret da veza tamallet e giz e-bed. Glac'haret oun bet em c'haloun gant ar zonj e voa brema sellet, evel eur servicher fall d'ar c'houarnamant, piou-bennag a ioa fidel da Zoue ha, dre-ze, ne c'helle ket eur c'hristen ober mad he zever enn he stad.

4<sup>o</sup> War zigarez difenn liberte koustianz ar-re zifeiz, ne vezo kavet netra koulz hag an *anteramanchou sivil* ; enor a vezo great d'ar c'horfou maro a vezo beziet hep kroaz na bèlek ; ha klèvet e vezo meuli dirag an holl ar re ho devezo bet, enn ho buez, kasouni oc'h an Iliz katholic. Ar Frans, kenta bro gristen euz ar bed, e deuz bet glac'har hag anken o welet ar c'houarnamant oc'h ober mizou braz, diwar goust an holl, evit enori *anterramant* unan euz a vrasa enebourien ar relijion a zo bet biskoaz. Bez' e deuz bet neuze spount rak kastiz ha gwalen Doue, ha piou a c'hoar ha ne d-eo ket klenved hor Roue mad Herri, hirio, ar gastis-se a lavarar ama, kouezet war hor bro, evit ar c'hloar roet neuze da henez gant tud difeiz ar c'houarnamant ?

**Euz ar brezel a rear da Jezus-Krist ha d'he Iliz,  
e kever sevel ar vugale.**

Jezus-Krist en deuz bet diskouezet, epad m'eo bet war an douar, e kare ar vugale gant eun deneridigez ar vrasa. Abaoue Jezus-Krist, an Iliz, he bried, e deuz bet atao hag a-viskoaz eun aked braz evit-ho ivez. An Iliz eo e deuz abaoue, savet skoliou a-leiz ha lakeat relijiuzed euz a beb urz e penn ar skoliou-ze, evit deski bugale ar bobl war ar skiantchou ha war ar gwirionesiou kristen. Eun amzer-zo, ez oar ien ha divaniel e kever deski ho reli-

jion d'ar vugale, hag an dra-ze a zo d'ar c'houarnamant, evel eur penn-abek kenta da drei goude ar ienien-ze e kasouni oc'h ar relijion.

1° Lamet eo brema, euz ar skoliou normal, ar veleïen a ioa karget eno da zeski ho relijion d'ar re a vezo, divezatoc'h, mistri-skol ar vugale. Er skoliou normal brema ar re iaouank, ken paotred, ken merc'hed, n'ho deus skol e-bed ken war ar relijion, ne glèvont prezeg e-bed ken diwar-benn ar feiz. Hag hi a vez da zul enn oferen? Ne c'houfen her lavaret, ha goulenn a ran gant nec'h ha spount petra vezo divezatoc'h, petra vezo ar c'hèlennou hag ar skoueriou a vezo roet d'hor bugale er skoliou ?

2° Al lèzen a zifen deski ar c'hatekiz er skoliou, hag er meaz euz ar c'hlasiou e tifen zo-ken ober skol e-bed war ar relijion. Ar bèleg a zo difennet out-han mont er skoliou, el leac'h ma c'hellfe lakaat evez oc'h ar c'hentelliou a zo roet eno gant eun den zo he relijion dishevel, pe n'en deuz relijion e-bed. Ar bèleg a zo berr he amzer evit deski d'ar vugale ar gwirijonesiou kristen, ha diez eo d'ezhan ho dastum er meaz euz a amzer ar skol. Pa c'hell ho c'haout, ne d-eo nemet goude ar c'hlas, pa vezont skuiz dija o teski kentelliou-all; neuze ho spered skuiz-maro a vir out-ho da denna vad e-bed euz a skol ar relijion a rear d'ezho.

3° Ar skol a rear brema d'ar vugale a bella ho spered dioc'h ar relijion. Er skol ne vezo lavaret d'ezho ger euz ho deveriou e-kever Doue. Ho spered dre-ze a ielo buan da gredi n'ho deuz ezomm e-bed da anaout an deveriou-ze, pa n'euz hano anezho gant an hini en deus karg d'ho deski; hag e c'hellont dont da veza tud onest, tud goest da ober vad d'ho bro, tud enorabl hag enoret gant ho broïz, hep kaout ezomm e-bed euz a feiz nag euz a relijion.

Enn doare-ze, ne zesko ar vugale er skoliou netra euz a gement a zo ar muia red d'ezho da anaout, hag e chou-



mint dizek euz a hent ar vuez hag euz an deveriou ho devezo da ober. Enn doare-ze n'ho devezo nerz e-bed evit t'c'het dioc'h an drouk, evit herzel oc'h ho z'echou fall, evit ho harpa, ho skoazia ha rei d'ezho didorr ha frealz enn ho labourou hag er poaniou, a zo bemdez hag e pep leac'h oc'h heul an den war an douar.

4° An tadou hag ar mammou ho deuz bet karg digant Doue da ober euz ho bugale ne ket hep-ken tud onest hervez ar bed, mez ivez ha da genta kristenien war an douar, ha goude sent evit an nev. Dre-ze, ez eo eun dever striz evit-ho rei d'ho bugale skol gristen, deski d'ezho ho c'hatekiz, ho c'has d'an iliz ha lakaat evez out-ho eno. Mar kavont eur skol anavezet evit deski mad ar vugale war ar relijion, ne dleont espern na gwennek na danvez evit kas ho bugale d'ar skol-ze. Ma ne c'hellont e giz e-bed kaout ar skol gristen-ze d'ho bugale, e tleont, da vihana, a-raok ho c'has da skol e-bed gouzout pe seurt skol eo ; e tleont gouzout ha ne c'hellfet ket eno, dre gomzou, skoueriou, kelennoù, dre levriou pe imachou, bihanaat pe goll ar feiz kristen enn eneou ho bugale. Ar feiz a zo gwella mad en deuz an den er bed-ma.

**Diwar-benn al levriou a zo lakeat er skoliou  
etre daouarn ar vugale.**

Ar gelennadurez kristen a zesk d'e-omp hon deveriou; diskouez a ra d'e-omp ar vertusioù a dleomp da ober, ha diazezet eo war gelennadurez ha skoueriou buez Jezus-Krist. Jezus, Salver ar bed, o teski d'e-omp gourc'hemennou Doue, hor C'hrouer, hor Mestr hag hor Barner, en deuz lavaret, mar fell d'e-omp kaout ar vuez eternal ha beza euruz enn nev, e rankomp miret he gelennou, rak mar ho zorrump, ez aïmp d'en em goll da viken. Evel-se e teu nerz d'ar vertuz, hag an den o tistreï dioc'h an drouk dre zoujanz rag ar gastiz, a gerz war hent ar furnez.

Enn amzer zo brema, ez euz c'hoant da ober eur skol *moral* nèvez, ha da lakaat deveriou an den er meaz euz a skol Doue. Er skol *moral*-ze n'euz hano e-bed euz a zeveriou ar bugel e-kever Doue. An dra-ze a zo evel lavaret d'ezhan e c'hell beva hep relijion e-bed, ha n'eo red tamm e-bed d'ezhan beza e poan gant traou ar seurtse, a zo enn-ho koulskoude eurusted buez ar bed-ma hag ar bed-all da viken. Eun dra-bennag-all a zo c'hoaz. El levriou moral a lavarer, e troer an istor war eun tu hag a zigas er spered hag er galoun difisianz, dispriz ha kasouni e-kever an Iliz katholik. War gement-se, e lavaront ne c'hell beza burzud pe mirakl e-bed, hag an dimezi great hep-ken dirak ar mear a zo, eme-z-ho, kemend hag a ranker evit an daou bried, da veza dimezet e-leal hag hervez pep gwir. An den, eme al levriou-ze c'hoaz, en deuz nerz a-walc'h enn-han he-unan evit tè-c'het dioc'h an drouk hag ober ar mad ; dre-ze, n'en deuz ezomm e-bed da veza harpet ha skoaziet gant gras Doue.

Diez e ve nac'h ne lakafe ket al levriou-ze feiz ar vugale hag ho buezegez er bed e-risk da vont ha d'ho c'has da goll. Ouspenn-ze, da biou eo barn al levriou-ze, da biou eo gwelet pegement e noazont oc'h ar relijion, o veza lakeat er skoliou etre daouarn ar vugale ? Anat eo ne d-eo ket da Vinistr ar skoliou, ne d-eo ket d'eur prefet, da eur mear na d'eur mestr-skol lavaret ez int mad pe fall, lavaret ez int skrifet hervez pe a-enep ar feiz kristen. D'ar Pap da genta, goude d'an Eskibien ha d'ar veleïen eo gwelet hag al levriou-ze a c'hell beza roet pe difennet ho rei d'ar vugale. An Iliz a c'hell lavaret d'ar gristenien : « Mar fell d'e-hoc'h beza d'in bugale fidel, na lennit ha na list ket da lenn gant ho pao-tred na gant ho merc'hed al levriou a ziskouezan d'e-hoc'h a zo fall, ken evit ar feiz, ken evit buezegez an den. Difennet eo ouz-hoc'h derc'hel al levriou-ze. Ha ne d-eo ket dever eun Eskop, dever ar veleïen, ho deuz bet

karg da zifenn feiz ar gristenien, diskouez ar fallagriez a zo el levriou a-enep ar feiz ? Ne dleont ket beza evel chas mud ha choum ho ginou dilavar, pa zilamm al laer da glask diframma ar mad a zo dreist pep mad.

Ar veleïen a c'hell beza heb aoun da fazia e-kever barn er-vad kement a zesk al levriou a zo c'hoant da lakaat etre daouarn ar vugale ; heuilla reont,enn ho barn, barn an Tad Santel ar Pap. Enn amzeriou diveza-ma, ez euz bet hano aliez euz a varn an *Index*, ne ket digemet e Frans, eme ar republikaned. An dra-ze a zo trei diwar an ero. Al levriou a lavarer, ne d-int difennet, nemet o veza ma'z euz enn-ho kredennou a-enep ar feis katholik. N'eo ket kristen, piou-bennag n'en deus ket a fisianz e barn an Eskibien hag ar veleïen, lakeat e penn an Iliz evit pellaat an droug a ve d'ar feiz, ma lennfet levriou fall. Bez' e tle eta pep kristen, evit choum hep koueza er gripejou antellet da baka he feiz, goulenn ali digant he veleïen diwar-benn al levriou a gomz euz ar relijion. Ne c'houfe den kaout re a zisfisianz, enn amzer ma weler ar re a voull levriou hag a skrif er c'ha-zetennou, o kaout ken nebeud a c'hwisiègez euz ar gwirionesiou kristen, hag evelato, leun a ourgouill, o komz a-dreuz hag a-hed euz a draou n'ho deuz desket biskoaz ha ne c'houzont netra anezho.

**Euz ar brezel a rear d'an Eskibien  
ha d'ar veleïen.**

An Eskibien hag ar veleïen ho deuz, e peb amzer, roet harp ha skoaz da beb gouarnamant a zo bet e Frans, epad ma c'houlennet digant-ho nemet ar pez a ioa evit mad tud ar bed koulz hag evit mad an eneou. Enn doare-ze, eleac'h enebi oc'h kement a c'helle kreski deskadurez ar vugale, e vezent ar re genta oc'h alia ann holl da zeski, pa dlie ar skoliou a zavet ober, hervez al lêzen, skol d'ar

vugale war ar religion. Evelse a reant ivez e-kever an ospitaliou, ar prizouniou, e-kever an holl oberou a drugarez evit ar beorien ; atao hag e pep leac'h ez int bet gwelet e penn an dud vad. Ar bèlek, dre he labour, a zigor hent pep mad, a gennerz kaloun ar relijiuzed en em ro, evit Doue, da derri nerz poaniou ar re baour hag ar re ankeniet. Goude-ze, e c'heller goulenn penaoz eo bet ankounac'heat ker buan, penaoz zo-kenn eo bet tamallet madèlez ha trugarez ar bèlek ? Ar bèlek a zo, e gwirionez, mignoun ar bobl hag evelato, enn amzer-ma, e vez great d'ezhan, gant darn zo, evel pa ve he enebour brasa. War an dra-ma e ve kavet meur a dra da ziskouez ne ket gaou a lavarar.

1° An Ilis ne deuz pinvidigez e-bed. Ar madou e devoa a-raok ar revolution a zo bet lamet digant-hi. Ar re a zo galvet dre c'hras Doue da veza beleïen, hag a zo desket ha maget gant an Iliz er seminèriou bihan ha braz, ar re-ze, an darn vrasa anezho, a zo bugale tadou ha mam-mou kristen, mez tud paour euz a vadou ar bed. Bez ez int bugale labourerien douar, bugale artizaned, martoloded, ha re all ne c'hounnezont ho bara ha bara ho ziadou, nemet dre boan ho diwreac'h ha dre labour tenn ha kalet. Ofransou ar veleïen ha re ar gristenien vad a d-eu da zikour paourentez ar seminèriou. Dre gement-ze, eo eaz gwelet hag anaout ho doa ar seminèriou-ze ezomm da gaout sikour hag harp digant ar c'houarnamant, sikour hag a roe a-raok d'ar re baoura euz ar skolaerien. Brema, lod euz ar zikour-ze a zo tennet ha leac'h da gaout aoun a zo na ve tennet lod-all, ken na choumo mui netra. Neuze, e vezo tro, a-nèvez, da c'houlenn kresk war aluzennou ar gristenien vad. Ar re-ma a vezo binniget gant Doue evit an diouer ho devezo da rei, a-galoun vad da aoteriou an Ilis, beleïen da gonzakri korf ha goad hor Zalver.

2° Droug ha kasouni ar re zifeiz a ia c'hoaz war-lerc'h

ar bèlek, e pep leac'h ma kerz da ober he zever santel. Klask a rear miret out-han da brezeg d'ar gristenien, evit ho c'helenn ha diskouez d'ezho ema brema feiz ar vugale e risk hag e-tal da vont da goll er skoliou, dre al levriou fall a lakear eno etre ho daouarn. Ar bèlek en deuz digant ar c'houarnamant eun tamm paë, evit digoll ar madou a voe lamet digant-han gant ar Revolution genta. An tamm paë dister-ze a vez tennet digant-han, brema aliez, o klèvet hag o selaou flatérez ne c'heller ho dislavaret, pa ne roer ket da anaout hano ar flaterien. Evelato, tamallet ne c'hoar evit petra, ar bèlek a goll he bae hep ma c'hell en em zifenn; gouzanv a ra hep klemm enn eur ober he zever, dre m'ema atao dirak he spered kelen an abostol sant Paol a lavar : ne dle ket komzou Doue beza dindan dalc'h e-bed, hag e tle ar bèlek prezeg e poent hag enn amzer hag a-enep peb amzer; e tle pedi hag erbedi; e tle gourdrout o c'houzanv ha gourdrout o kelenn, er mareou ne fell mui d'an dud klèvet an doktrin zantel ha ma tistroont ho diskouarn dioc'h ar wirionez, evit mont da redeg war-lerc'h flabennou. (Tim. II-4.)

Petra d-euio feiz tud hor bro da veza, ma ne c'hell ken ar bèlek prezeg an doktrin gristen, hervez ar wirionez hag evel ma'z eo bet desket gant Doue.

3<sup>o</sup> Abaoue eur pennad amzer-ze, em meuz eun nêc'hant hag eur boan vraz o klèvet ez euz hano da zistrei, dioc'h servich an aoteriou, an dud iaouank a zo galvet da veza beleïen, hag a zo oc'h en em lakaat e doare da ren eur vuez a binijen, a beden hag a zakrifiz. C'hoant a zo da lakaat da vont da zoudarded tud iaouank ar siminèriou, d'ho lakaat dre fors da veva er c'hazerniou e pe-leac'h ho feiz, o koll a-bred he nerz, e teuint da zilezel ar zonz e doa savet ho eneou war-zu an nev, pa voa ho c'hoant en em rei holl da zervicha Doue. Dre gementse, eo eaz gwelet ema an Drouk-Spered oc'h enebi oc'h beleïen Jezus-Krist, ho deus kaset he c'halloud er bed da

goll. An Drouk-Spered, o klask mouga pe vihanaat ofrans sakrifis santel an oferen, a gendalc'h er bed sakrifis kroaz ar C'halvar, a fell d'ezhan miret na zougfe ken a frouez goad hor Zalver Jezus, skuillet evit prena ar bed. Tud hor bro gristen, hag hi a ve evit dont da veza hevel oc'h ar Juzevien, a zo o veva e-kreiz poblou an douar, heb aoter hag hep sakrifiz e-bed ?

**Euz ar brezel a rear d'ar relijiuzed, ken goazed,  
ken merc'hed.**

An Eskibien hag ar veleien ho doa evit ho zikour enn ho labour relijiuzed santel. Ar re-ma, bet kavet mad ha binniget ho ursiou gant an Tad Santel ar Pap, a zo bet en em zastumet e kouentchou evit en em rei da eur vuez santeloc'h, evit en em lakaat a-zoare, o studia a-zèvri, da brezek komzou Doue ha da zifenn ar relijion. Savet ho deuz bet skolachou evit deski enn-ho d'an dud iaouank ar vertusioù kristen, koulz hag ar skiantchou kaer euz ar bed. Ar skolachou-ze a zo bet serret, ar relijiuzed a zo bet kaset kuit dre forz euz ho ziez hag euz ho c'houentchou ha forbanet, unan ama, unan a-hont; ho ilizou hag ho chapelioù a zo bet, hag a zo c'hoaz siellet ho dorjou. Evit petra mac'ha ha gwall-gas tud, ne gavet da damall d'ezho nemet ho vertusioù, nemet ho c'harantez oc'h Doue hag oc'h ho nesa, nemet ho buez santel ? Evit petra prena an ties-se savet gant hon tadou evit pedi hag ober pinijen, evit kana meuleudi Doue, evit renta d'he vajeite an enor hag al lid a zo dleet d'ezhan, hag evit pere e skuill war bennou an dud he c'hrasou hag he vennosioù, kals puilloc'h ha stankoc'h ?

Ne ket echu c'hoaz ar brezel-ze a zo great brema d'ar relijiused. Traou c'hoarvezet a-nèvez-ze a ro d'in nec'h hag a ra d'in poan. Skolioù frèred ha seurezed a ioa enn-ho fizianz an tadou hag ar mammou a zo bet serret. Enn

ho leac'h, ez euz lakeat mistri ha mestrezed-skol laïk a zo bet digemeret gant disfisianz hag aoun. E meur a gear e Frans, ez euz bet kaset kuit euz an ospitaliou seurezed hag ho doa konsakret ho buez evit entend oc'h ar re glanv, goude m'ho doa great ho dever out-ho, gant eur garantez ne dlie beza nemet meulet. Petra ne dleer ket da c'hortoz, ma ne c'hell ken an eneou kristen lakaat ho c'haloun da gaout aked euz ar re baour hag euz ar re glanv dre garantez oc'h Doue ; ma ne c'hellont ken en em rei da derri ners poaniou an dud keiz, ma ne c'hellont ken servicha Jezus-Krist enn he vemprou pe enu he izili gloazet ha poaniet ? Penaoz e ve diskouezet ken ar ienien hag ar gasouni a zo brema oc'h kement tra a zigas da zonj euz a Zoue, euz a vuez Jezuz hag euz ar relijion zantel en deus savet evit savetei ar bed ?

Gant ar spount a d-eu var-n-oun dirak kement a welan, dirak kement a glèvan, dirak kement a lennan, ar beden hep-ken a zo va rekour. Pedi a ran Jezus, Mari, Josef, ar zent koz euz a Vreiz a zo bet he zent-paëroun hag he ebestel. Lavaret a ran gant an lliz ar beden a c'hlac'har hag a ran galoun : *Parce, Domine, parce populo tuo, ne in æternum irascaris nobis*. Goulenn a ran digant ar gristenien dont da forsi Doue da drei out-ho, dre ho fedennou, dre ho aluzennou. dre ho madoberou. Ar gristenien a zo braz ho niver, mes kousket int ha ne velont ket evel eur mor a boaniou o tont da ziroll war-n-ho. Ra zeuio ar c'homzou-ma d'ho dihuna euz ho c'houisk, evit ma kriint oc'h Doue, gant ho c'haloun doaniet, ar c'hlemvan divèza-ma : *Domine, salva nos, perimus !* Aotrou Doue, saveteit ac'hanomp, mont a reomp da goll ! (Sant Vaze. VIII.-25.)

**Eur Bèlek-koz.**

---

Kemper, moulet e ti AR. DE KERANGAL, mouller ann Eskopti.

The first part of the paper is devoted to a general  
 introduction of the subject. It is then divided into  
 three main sections. The first section deals with  
 the general principles of the theory. The second  
 section is devoted to the application of these  
 principles to the case of a particular system.  
 The third section discusses the results of the  
 calculations and compares them with the  
 experimental data. The paper concludes with a  
 summary of the main findings and a few  
 remarks on the future work.

The second part of the paper is devoted to a  
 detailed discussion of the theory. It is then  
 divided into two main sections. The first  
 section deals with the general principles of the  
 theory. The second section is devoted to the  
 application of these principles to the case of  
 a particular system. The paper concludes with  
 a summary of the main findings and a few  
 remarks on the future work.

The third part of the paper is devoted to a  
 detailed discussion of the theory. It is then  
 divided into two main sections. The first  
 section deals with the general principles of the  
 theory. The second section is devoted to the  
 application of these principles to the case of  
 a particular system. The paper concludes with  
 a summary of the main findings and a few  
 remarks on the future work.